



# SON AR MILINER

Diou blac'h yaouank diwar ar maez ; O - la  
 la - la - la - la - la - la - ne    Oa aet d'ar vilin eun nozvez  
 Oa aet d'ar vilin eun nozvez o - la  
 la - la - la - la - la - la - ne

Polig MONJARRET  
 FON dastumet gant

KOMZOU dastumet gant  
 Albert TREVIDIC

Ton savet e Glomel (Kerne) war-dro 1880  
 ha kanet gant Marianne NICOLAS,  
 lezhañvet « Plac'h Paour », eus Glomel.

- |  |   |
|--|---|
| <p>I<br/>                 Diou blac'h yaouank diwar ar maez,<br/>                 O la la la la la tène<br/>                 Diou blac'h yaouank diwar ar maez,<br/>                 O la la la la la tène<br/>                 'Oa aet d'ar vilin eun nozvez,<br/>                 O la lè la la la la lo<br/>                 'Oa aet d'ar vilin eun nozvez,<br/>                 O la la la la la tène</p> <p>II<br/>                 'Toull ar vilin p'oant erruet,<br/>                 O la la, (hag all...)<br/>                 Ar miliner a oa kousket.<br/>                 O la la...</p> <p>III<br/>                 « Savit 'lese miliner laer ;<br/>                 Da val' hor samm d'imp dont d'ar<br/>                 [gér. »</p> <p>IV<br/>                 « Petra 'zo ganeoc'h 'n ho sac'had ;<br/>                 Pa oc'h erru' ken diwezat ?</p> <p>V<br/>                 « Kerc'h ha segal ha gwiniz du ;<br/>                 P'emañ ar vilin war he zu.</p> <p>VI<br/>                 « O ! war he zu, pe n'emañ ket ;<br/>                 Bremalk, touchen e vo lakaet.</p> <p>VII<br/>                 « ... Ola ! Ola ! Miliner laer ;<br/>                 Torret eo las va zavañjer. »</p> | <p>VIII<br/>                 Seitek devez ha triouec'h miz ;<br/>                 Oo bet an aotrou e Paris.</p> <p>IX<br/>                 P'oa erruet 'n aotrou er gér,<br/>                 Oa chañchamant (1) 'barz e vaner.</p> <p>X<br/>                 An Aotrou en deus goulennet :<br/>                 « An Itronez pelec'h eo aet ? »</p> <p>XI<br/>                 « 'mañ 'barz ar gambr an uhela,<br/>                 'Tomma he mabig terrupla. »</p> <p>XII<br/>                 « Eur mab bihan glas e lagad,<br/>                 'Vez ket gouiziet piou eo e dad. »</p> <p>XIII<br/>                 « Ne ouian ket da biou vefe,<br/>                 'Met d'ar miliner laer e ve... »</p> <p>XIV<br/>                 « Bonjour (2) deoc'h miliner laer,<br/>                 Erru oun d'ho klask da gomper. »</p> <p>XV<br/>                 « Da gomper, nann, me n'ez in ket.<br/>                 Rak va milin 'zo war he boued. »</p> <p>XVI<br/>                 « Me 'ouie mat, miliner laer,<br/>                 Vefec'h ket bet tad ha komper ! »</p> <p>XVII<br/>                 « Dalc'hit hoc'h Itron, 'barz ar gér,<br/>                 'Ne vin ket bet (3) tad a komper ! »</p> |
|--|---|

(1) Kemm. — (2) Demat. — (3) Ne vefen ket bet.